



STUDI
HAG
OBER

NIVERENN 6



NEVEZ ALZER 1938

DASTUMADENN DRIMIZIEK



S T U D I H A G O B E R

— Dastumadenn drimiziek —

R e n e r i e n : An Ao.beleg Loeiz Ar Floc'h
Institution St-Joseph - Lannion

An Ao.beleg Per Yann Nedeleg
Grand Séminaire de Quimper


Kas an arc'hant (8 lur ar c'houmanant bloaz)
d'an Ao. Nedeleg - Kont-red 193.17 Nantes




TAOLENN ar 6^{vet} Niverenn (Nevez-Amzer 1938)

XXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXXX

- Sent koz Breiz-Izel dirak an Istor : p. I - 20
- Digoradur da Levr ar Psalmou : p. 2I - 27
- Emweladenn ar Werc'hez gant Santez Elizabed : p. 28 - 30
- Prezegenn d'ar vugale evit ar Gonfirmasion : p. 3I - 34
- Follenn-c'heriadur, a vo kavet enni ar gerioù diaes



An Niverenn 7 a zeuio er-maez
e-pad an ehan-skol hanv



SENT KOZ BREIZ - IZEL
^^

DIRAK AN Istor
^^

(Diwar an Ao.Chaloni KERBIRIOU)

+ + + + +

S t e u e n n

- I. Alberz Ar Bras (Albert Le Grand)
e vuhez (tiegezh,prezegereziou,enklaskou)
e oberenn (e enklask-istoria,e vammennou,e levr)

II. Adalek Alberz Ar Bras: araokaat ar Sentistorouriez*keltiek

Mammennou nevez:

- 1/ ar skridou: ar "Vita Samsonis"

Buhez S.Samson hervez Alberz Ar Bras,
hervez ar Vuhez-se

- 2/ ar savaduriou: kroaziou-hent

mein gant enskrivaduriou

feuteuniou

- 3/ ar Sentanvadurouriez* hag al lec'hiadurouriez*

III. Kehelerez* d'ar Sent koz Brezon

- 1/ kendastumou* gounezet - kudennoù arvarus c'hoaz

- 2/ astenn ar c'hehelerez-se

IV. Doareoù hon Sent

o diazezaduriou - ilizou - chapelioù

o labourioù - reolenn - doare-beva

Ar studiadenn-mañ a,zo bet kempennet diwar hini an Ao.Kerbirioù evit Bleun-Brug Rosko (miz cost 1936),ha displeget eo bet e Kloerdi Kemper d'an 8 a viz kerzu diweza,gant an Ao.Yann Geleoc dirak e holl genvreudeur.

SENT KOZ BREIZ IZEL

"Ne anavezet ket Breiz ma vezer diouizieik war ar pezh a sell ouz Sent Brëiz". Ha kement-se a zo gwir. A-viskoaz, en istor ar poblou kosa, e c'heller gwelout e veze roet d'ar c'hêriadennou hanoioù an dud vrudet. Ma sellomp ouz kartenn hor bro Breiz, e vezimp souezet o verzout^x kement all a vourc'hou pe a diegeziou paeronet gant Sent. Peadra 'zo da souezi an estren ha Breiziz zoken... rak ar Sent-se n'int ket anavezet, koulz lavaret, gant hor c'henvroiz.

N'eus ket pell, edon o pourmen war douar Plouzeniel, va farrez, demdost d'eun tiegezh hanvet "ar Gwevrog". D'am meno, ha goude beza studiet eun nebeut ar gudenn, an hano a zeue eus hini Sant Gwevrog. Hogen, pa c'houlennis digant eur paotr yaouank ha gouzout a rae petra venne lavarout an hano penn-kêr "ar Gwevrog", ne ouezas ket an tu da respont d'in... ha pa gomzis d'ezan eus Sant Gwevrog, e tistagellas krenn e deod evit eilgeria d'in: "Sant Gwevrog! heñvel eo hennez ouz kalz Sent koz: n'eus morse bet anezañ!"

Kalz a Vretoned a c'hoarvez ganto evel gant ar paotr yaouank-mañ. Marteze avat, ez eus abegoù a bouez evit-se... Ar c'henta hag ar gwasoù moarvat eo dre ma ne vez ket desket istor Breiz er skolioù (pa ne vez ket, c'hoaz, taolet dismegans war "seurt kontadennoù"). Hogen ne gomzin ket eus an abeg-se, p'eo gwir va menoz eo diskleria penaos breman, warlerc'h an holl enklaskoù a zo bet graet gant ar ouizieien, e c'hellomp kredi start e buhez Sent Breiz, harpa ma c'hellomp hôr prouennoù^x war skridoù koz bet miret ha dispaket, pe war savadurioù^x (kroazioù, mein enskrivet, feunteunioù) kavet ken war douar Breiz, ken e Bro-Gembre hag e Kerne-Veur. Met arack degouezout gant al labour-se, em eus c'hoant displega dirazoc'h eun tammig doare ar skrivagner brudet Alberz Ar Bras, breur dominikat eus kouent Montroulez.

x
x
x

ALBERZ AR BRAS

Arack skridoù dom Lobineau ha re dom Moris (en XVIIIvet kantved), e chomas studi ar gwrizioù kristen en hor Breiz diazezet war eun enklask istorek^x difounn ha laosk. Rebechet eo bet da Alberz Ar Bras (Albert Le Grand) beza bet re gredus e keñver an oberoù burzudus lakaet war gont Tadou hor Feiz. Daoust ha c'hoant e vefe lavarout, dre-se, ne oa ket Alberz Ar Bras gouest da zispartia

ar pezh a oa gwirion diouz ar pezh na oa ket? Pe c'hoaz ne vefe ar mammennou bet implijet gantan nemet kontadennoù, ha n'hellfemp ket, en e bikol levr, dastum gwirionez ebet? Taolomp eun tammig pled war ar c'hadennou-se, gant sikour ar c'havadennou nevez-zegouezet.

Alberz Ar Bras a oa, sur mat, tuet war an enklaskou. Se a zeue d'ezan eus e dud. Bez' en doa en e levraoueg levr ar chaloni Ewan Ar Bras, kanseller iliz-veur Leon, person Gwineventer ha Plouzeniel, aluzenner an Duk Fransez an II^l. An dastumadenn-se, daou gantved d'ezi abenn neuze, a gonte istor hen-amzer Bro-Leon. Eun ezel all eus ar familh, Visant Ar Bras, senesal Karaez, aotrou Kerskao Kerioal, en doa lezet ive skridou diwarbenn ar c'hêriadennou, hag ar skridou-se a oa kouezet, dre legad, etre daouarn Alberz.

Alberz e-unan, endra ma prezege, a studie diellou^{*} ar parrezioù, a zastume an hengounioù^{*} evit sevel e bikol levr. Vikel vras menec'h Sant-Dominik a veul Alberz evit e venoz; e skoazell a ro d'ezan evit aesaat e enklaskou; gopra 'ra kement hini a c'hell e sikour: "Kement hini ho sikouro a vezo deuet mat d'hor c'halon." Ha d'an 29 eus miz mezeven 1628, e tegoueze gant Alberz al lizermañ: "Gant fiziañs e talvezo ho labour d'hon warlerc'hidi, hoc'h aotreomp da gantreal dre Vreiz e kement lec'h m'ho pefe sonj kavout peadra da zeski eun degouezadenn pe da sklerijenna eur poent arvarus bennak, ha zoken ho pedi 'reomp da skriva, ar buana ma c'hellot, ar pezh, a gavo d'eoc'h, a vo ar gwella evit klod Doue holl-c'halloudek ha mad an Iliz katolik."

Diouz lavarioù Alberz e-unan e c'hellomp anaout e hent-studi, e zoare enklask istorek, da vihana eun nebeudig bennak anezañ. En eul lizer skrivet d'ar 27 eus miz ebrel 1636 d'an Ao. Rozmadek, e c'houlenn Alberz beza diarvaret diwarbenn stumm gwirion eur skoued-ardamez^{*}. Derc'hel a ra kont eus ar pezh a vez rebechet d'ezañ; degemer a ra an difaziadurioù^{*} kinniget d'ezañ; gwelet e vez o veaji evit lakaat an dorn war skridou bet diskuliet d'ezañ; keuzi a ra d'ar mammennou a briz a ra diouer d'ezañ, evel an dornskrid-se bet prestet gant eun denjentil da eskob Landreger evit reizha roll Sent e eskopti; klask a ra er-maez eus harzou Breiz; goulenn a ra arroudoù^{*} eus diellou eur c'hontelez eus Bro Iwerzon...

Alberz, warlerc'h pep buhez en e levr, a zo aketus da rei d'eomp da anaout e pelec'h en deus kavet danvez e skrid: dornskridou abati Landevenneg ha Sant-Vaze Penn-ar-Bed, iliz ar Follgoad, brevielou koz, moulet pe dornskrivet, bet implijet e nao eskopti Breiz, rollou dornskrivet an eskibien, bloazdanevellourien^{*} evel d'Argentré, Alan Douchart, an Tad Aogustin Ar Paz, oberour al levr "Histoire

généalogique des maisons illustres de Bretagne", ar buheziou Sent a oa er vro d'e amzer, hag all...

Gant an danvez-se, anavezet c'hoaz meur a damm anezo en hon amzer, e lakeas Alberz Ar Bras moula, er bloavez 1636, en Naoned, e ti Per Doriou, eur mell levr a 814 pajenn: "Les vie, gestes, mort et miracles des Saints de Bretagne Armorique; ensemble, un ample catalogue chronologique et historique des évêques des neuf évêchés d'icelle, accompagné d'un bref récit des plus remarquables événements arrivés de leur temps - par le frère Albert Le Grand, de Morlaix, profès au couvent de Rennes".

Alberz e-unon a anzav n'eo ket al levr skrivet eus ar c'henta, en eun doare dreist, met displega a ra "oberou mat an dud kadarn-se o deus gwechall brudet ar vro-mañ dre o santelez hag o deus he finvidikaet dre relegou prizius o c'horfou."

Hep ankounac'haat he deus pep danevell ha pep marvailh eun diazez a wirionez, pisaomp^x ouz re hor Sent koz gant karantez ha youl vat, o klask digemmeska ar wirionez diouz touez ar pez a zo bet laket en he c'hichen evit he bravaat, ha gouzout ervat petra oa an dud-se a veve en hor bro bremañ trizek pe bevarzek kant bloaz 'zo.

x^x
x^x
x^x

II. ARAOKAAT AR SENTVUHEZOURIEZ KELTIEK

Abaoe Alberz Ar Bras, eo aet ar sentvuhezouriez kalz war raok. Hogen ne vihana tamm ebet hor c'hredenn e Sent Breiz, pell ac'han. An enklaskou troet war gement-se a starta zoken hor c'hredenn. Tennomp kuit, lezomp, brasa ma c'hellomp, o lodenn gant an traou burzudus (ha n'int c'hoarvezet morse marteze)... chom a ray bepred, e doun ar gaoter, ar sol aour-teuz^x, aour ar wirionez. Hag ar wirionez eo: ez eus bet, er pempvet hag er c'houec'hvet kantved, etre an diou Vreiz, enez Vreiz hag hor bro-ni, eur ch'enwerz speredel kreñv meurbet. An darempred-se a zo bet displeget gant tud eus an amzeriou-se, evel ar re genta a savas buheziou Sent, pe Sant Beda (672 - 735), eur Saoz eus Northumbria, gwella istorour kristen e amzer. Hag ouspenn, roudou kelennerz an Aviel a zo chomet merket war an douar, e meur a lec'h.

D'ar poent ma 'z eo en em gavet hirio an enklaskou, e c'hallomp eeuna meur a fazi graet gant Alberz Ar Bras. Gant dastumou ar sentvuhezouriez

a-vreman ez omp gouest da zirouestla meur a gudenn. Da skouer, gouzout a reomp eo bet skignet an Aviel en hor bro gant tud deuet eus Kornog-Izel Bro-Saoz. Hogen Alberz Ar Bras a laka hor Sent ganet en Arvorig, pe a lavar int deuet eus Iwerzon. Ha neuze, n'eo ket re varrek war douaroniez^x ar broiou tra-mor: Kembre a zo meneget gantan eur wech pe ziou, koulz ha Kerne Veur, met an daou gorn-douar-se a zo kemeret an eil evit egile.

Evit gwir, n'hon eus ket tro da veza souezet o welout rei Iwerzon da vro c'hinidik d'hor Sent, rak bez' eo bet Iwerzon eun eienenn a feiz hag a yeas ar bannou anezi da bara war gement korn eus Bro-Saoz (Breiz Veur).

N'omp ket muioc'h souezet pa zegouez da Alberz Ar Bras kamm-amzeria^x, hag hen ober a ra meur a dro, evel pa lavar d'eomp e voe sakret sant Kaourantin e Tours gant sant Varzin. Hogen sant Varzin a zo maro er bloaz 397, ha sant Kaourantin, hervez Alberz e-unan, n'eo ganet nemet eur c'hantved goude, er bloaz 492. Ar fazi a zo bet graet gant oberour ar Vuhez bet implijet gantañ, ha d'an ampoent m'en doa arc'heskob Tours da welout war eskibien Breiz.

Ar skridou o deus talvet da Alberz Ar Bras evit aoza e labour meur a zo deuet betek ennomp, darn anezo da vihana. Hag abaoe, mammennou all, nevez-gavet pe studiet pisoc'h, o deus skuilhet brasoc'h sklerijenn war istor hor Sent koz. E daou rummad e c'hallomp o renka: ar skridou - ar savaduriou^x.

Tra-mor koulz hag e Breiz, hon eus skridou ha savaduriou (pe "bolzou-arouez"), met ni, en tu-mañ, a zo pinvidikoc'h gant skridou. Kerne Veur he deus miret deiziaduriou^x koz ha roll-merzerien^x Exeter, ennañ kalz hanoiou Sent, met n'he deus ket nemeur a Vuheziou en o fez: n'anavezomp nemet Buheziou Sant Gwinear, Sant Petrok ha Sant Kae hag a vefe bet skrivet er vro. Aloubadeg^x an Daniz en unnekvet kantved, an Disivoud-Meur^x da vare Herri an VIII^{vet}, hag a zismantras kement a abatiou, a zo kaoz, moarvat, ma 'z eo ken paour Bro-Saoz e skridou koz. En eneb avat, he deus Kerne Veur muioc'h a savaduriou egedomp-ni a-zivout hor Sent koz.

Abaoe eun tregont vloaz bennak, strolladou klaskerien o deus unanet o strivou^x evit tizout tostoc'h ar wirionez diwarbenn Sent Vreiz ha prezegerez an Aviel en hor bro en o amzer. En tu-mañ d'ar mor e kavomp: an Abad Duine, Ferdinand Lot, Jozef Loth, Largillière, ar re vrudeta - en tu all, e Bro-Saoz: Bishop Stubbs Ch. Henderson (oberour eun "Istor Kerne Veur"), hag an Ao. Doble.

a/ AR SKRIDOU

E Breiz, al lennegezh sentvuhezouriek^x he deus degaset betek ennomp eur bern Buhezioù skrivet e latin. En eur vont war hor c'hiz, eus an XII^{vet} d'an IX^{vet} kantved, e kavomp evel-se Buhezioù Sant Ronan, Sant Kaourantin, Sant Brieg, Sant Goueznou, Sant Judikael, Sant Meven (pe Mean), Sant Gwenole, Sant Magloar, Sant Tutwal, hag all...

Ha kosoc'h eget ar re-ze holl (ha n'int peurliesañ nemet eilskrivadurioù koantaet diwar Buhezioù all), en em ziskouez Buhez Sant Samson.

Alberz Ar Bras n'en deus ket gwelet ar Vuhez-se, an dosta da amzer an divroidigezh^x. Mabillon eo ar c'henta en deus hec'h embannet en "Oberou Sent Urz Sant Benead", hag ar Vollandiz^x o deus roet lec'h d'ezi ivez en o dastumadenn; met, kent an tregont vloaz diweza-mañ, n'eo ket bet staget ar vurutellerezh^x warni. Robert Fawtier, kelenner war Istor ar Grenn-Amzer e skol-veur Kaero^x, en deus graet anezi eun embannadur gouiziezh meurbet. Jozef Loth -Doue d'e bardono- en deus skleriet an hanoù-tud en em gav enni, hag adanavezet^x kement hano kêriadenn a zo meneget ebarz. Gant an abad Duine, erfin, eo bet adkavet al levrioù implijet gant oberour ar Vuhez-se. War e veno, ar "Vita prima" a dliz beza bet savet gant eur manac'h eus abati Dol, wardro ar bloavezioù 610 pe 615. Bez' ez eo eur skrid a dalvoudegezh dispar. Evit istor Bro-Gembre, Kerne Veur ha Breiz Izel: deski a reomp enni kalz traou, n'eo ket hepken diwarbenn Sant Samson, met ivez diwarbenn Sant Iltud, ar priol brudet meurbet.

En e levr, Alberz Ar Bras a dec'h kalzik diouz testenn ar Vuhez-se. Lakaat a ra Sant Samson ganet en Arvorig, war harzou Bro-Wened ha Kerne. Diskouez a ra d'eomp e gerent o treuzi ar mor gantañ hag o tistrei goude beza e lezet etre daouarn Sant Iltud, er skol elec'h m'edo ive Paol ha Gweltaz. Eno e resev an urzioù digant arc'heskob York, arack en em denna e manati an abad Pyron, a rene eun tolzennad^x menec'h en eun enezenn. Da c'houde, eme atao Alberz, e tistro da Vro-Arvorig, elec'h ma c'hounez e dad hag e bemp breur da Zoue hag o laka zoken da vont da venec'h; treuzi a ra adarre da Vro-Saoz evit kemer lec'h an abad Pyron, kimiadet diouz ar bed-mañ, hag en em denn er gouelec'h, prezeg an Aviel d'ar falsdeñidi, ha diazeza eur manati. Ar vosenn a gouez war ar vro abalamour ma oa dilezet Doue gant an dud. Samson a ziskenn a-nevez en Arvorig hag a glev kelou eus muntr Joua, roue Breiz, lazeta gant Konomor, kont Leon. Mont a ra da gaout Judwal, mab Joua, en em warezet^x e lez Childebert, e Pariz. Adlakaat a ra an hêr gwirion war

e gador-roue, hag eskibien Breiz a c'houlenn eskopti Dol evit Samson, ar pezh a zo asantet gant Judwal. Diouz goulenn ar roue, ar Pab Pelaj a ra eus Dol eun arc'heskopti, er bloaz 555, en eur rei da Samson da welout war ar c'houec'h eskob all a oa e rouantelez Vreiz. En uhelgarg-se, Samson a evesa mat ouz e vagadou tud, oc'h ober bep bloaz tro e eskopti, o reiza ar boaziou fall, o sevel ilizou, o lakaat ar parrezioù dindan beleien desket ha santel, o voda eur sened beleien^{*} evit gouarn gwelloc'h an eskopti. En em gavout a ra e sened-iliz^{*} Pariz (559), kemenn a ra reolennou fur evit ar manatiou, ha, goude beza skarzhet e eskopti eus pep elfenn^{*} fals-doueadelez, e ro e ene mat da Zoue, warlerc'h rei e vennoz d'an arvesterien^{*} ha resev sakramant an Nouenn.

Gwelet hon eus e lavar Alberz eur ger eus diazez iliz-veur Dol hag eus he gwir d'al lec'h kenta e Breiz, gwir hag a voe penn-abeg da gement a vreutadegoù^{*} e-doug ar grenn-amzer. E sened-iliz Tours (570), emezañ, "e voe strafuilhet eun tamm an Tadou gant ar gador nevez-se a arc'heskob, hep klemm na trouz ebet evelato. Sant Gregor (1), daoust d'ezan da veza gwall dost da wiriou e Iliz ha flemmus en e skridou, ne gomzas morse eus an dra-se hag a lezas e peoc'h hor Sant Samson hag e warlerc'hiad Sant Magloar."

Setu aze, da vihana, degouezadennoù hag o deus eur stumm istorek, ha displeget zoken gant eur begadig burutellerez ha fent. Met, e levr Alberz, ez eus ivez traou dibaot^{*} meurbet, a zo amañ dioustu eun diverra anezo.

Evel Sant Yann Vadezour, Samson en deus eur c'hinivelez vurzudus. Ne vank netra, na gwelidigez Ael an Aotrou, na oad bras ar gerent, na dioggan eur red-buhez^{*} souezus. Eun ael c'hoaz a gemenn da Samson kuitaat douar garo Bro-Saoz evit mont d'an Arvorig, ha komzou an ael-se a denn kalz d'ar mouezioù a glevas Abraham ha Sant Jozef. Per, Jakez ha Yann en em ziskouez ive da Samson evit dioggan d'ezañ, e-kreiz e gousk, e vezo graet eskob. Pa vez o pedi, "e benn a vez eur c'helc'h tan en dro d'ezañ". Bez' ez eo eur burzudour: tud diaoulet pareet, bugale degaset yac'h pa vennent mervel, ha pareansou burzudus e-leiz a zo lakaet war gont ar Sant... Mont a reomp zoken betek rouantelez ar marzou^{*}: Samson a zegouez alies erevent^{*} war e hent, ha bewech e chom an trec'h gantañ.

(1) Gregor, eskob Tours, eo, hag hanvet eo "sant", d'août n'eo ket kehelet gant an Iliz katolik. — (Notenn ar Renerez)

Selaouomp c'hoaz an istor-mañ a gont d'eomp Alberz:

"Bez' e oa, e kichen Dol, eun aotrou hanvet Frojerius, pinvidik ha galloudek er vro, mignon bras ha madoberour Sant Samson hag e venec'h; met e wreg, en eneb, ne oa ket gwall vignonez d'ezo; hag, evit chifa^x ar sant hag ober gaou ouz e venec'h, p'edo foenneier ar manati goloet a foenn kaer dare da veza falc'het, e lavaras ar vaouez-se d'he mesaer-moc'h kas e loened da beuri ar foenneier-se. Sant Samson, deuet kelou d'ezañ, a reas o c'has kuit ha lavarout d'ar mesaer chom hiviziken hep dont mui eno gant e loened, ar pezh a roas droukrans d'ar vaouez-se, ken e reas o c'has a-nevez eno dioustu antronoz. Ar prelad santel, o welout se, en em erbedas ouz Doue evit goulenn skoazell evit ar madou fiziet en e venec'h, ha raktal e voe treuzfurmet ar moc'h e bouc'hed lous ha flêrius, ma voe souezet ar vaouez-se: dic'haoui a reas ar manati, ha, goude m'he devoe goulennet trugarez digant ar sant, ar bouc'hed a gemeras o stumm kenta. Doue en doa roet da Samson eur galloud ken bras war al loened gouesa, ma rankas eul louarn, bet o laerez eur yar e klud ar manati, restaol e laeradenn, hag he degasas e-harz treid ar sant, elec'h ma chomas da c'hortoz kaout e binijenn ha beza kaset kuit. Hag al laboused gouez a dregase e venec'h gant o safar, eun nozvez o bodas-heñ hag o c'hlozas e porz ar manati, o lakaat an tav warno, ma ne nijas hini kuit, betek antronoz vintin m'o c'hasas kuit en eur zifenn outo dont mui da nec'hi ar venec'h, ar pezh a voe miret ganto didorr."

An danevellou loened a zo stank e Buheziou hor Sent koz: bez' ez eus al loened noazus, ma tieubont ar vro diouto, al loened gouez a vez donvaet ganto, hag al loened mat a zeu d'o c'haout. ⁽¹⁾

(1) Evit galloud ar Sent war draou an natur, gwelout levr an Ao. Calvez, person Lesneven "Les Pères de la Patrie au Bro-Leon", p. 34, 42, 44, 60, 61.

E Buhez sant Paol e lennomp kement-mañ:

"Ar manati (hini Iltud) a oa annezet e kichenig ar mor, hag ar mor, a nebeudou, a c'houneze war an domani hag a venne dismantra pep tra. Eun devez ma oa bet spontusoc'h ar barr-arne hag an tonnou fuloretoc'h, ar venec'h a c'houlennas digant Iltud lakaat harzou d'ar mor. Diskenn a ra an abad ganto war an aod, da zeiz eur reverzi bras, ma oa ar mor tec'het war mil kammed. Gant e vaz, Iltud a reas eur roufenn en traez; Divi, Gweltaz, Dubriz, Samson Raol ha Lunaer hag ar re all a savas traez war hed ar roufenn-se, holl e kouezjont d'an daoulin, oc'h azpedi Doue da rei urz d'ar mor douja an tamm fardell-se. Hag abaoe n'eo morse aet dreist, hag an da-chenn gounezet evelse, labouret gant Menec'h Iltud, a zougas ar c'haera eostou."

Hag an Ao.Doble a c'houlenn diganeomp chom hep c'hoarzin diwar goust an danevellou koz-se. Bremañ e vez dastumet piz ar boaziou koz fentus, a zo bet goapaet kement all, rak enno e welomp maen-diazez skiant ar werinoniezh^{*}. "Arabat d'eomp kredi, emezañ, war zigarez 'z eus kement abennadou burzudus e Buheziou hor Sent, e c'hellfemp chom hep o enori. Ar bobl eo he deus toueziet ar pennadou-se gant buhez he diwallerien hag he faeroned... N'eo ket skigna ar wirionezh ober goap ouz hor Sent."

Ar wirionezh a gaver amañ hag ahont en danevell. Ma pisaomp eun distera ouz ar skridou, e kavimp kemmou bras etre amzer ar mammennou implijet gant Alberz Ar Bras ha hini ar Vuhez genta ("Vita Prima"). Faltazi sentvuhezourien kehelus^{*} he deus labouret etre daou.

Oberour ar Vuhez-se a ziskuilh e pelec'h en deus kavet an danvez d'he sevel: an darn vuiz eus e skrid a zo graet diwar eñvoradennou eur manac'h eus eur manati savet gant Samson tra-mor (da lavarout eo e Breiz-Veur), eur c'hoziad a 30 vloaz pe ouspenn, hag en doa eun eontr d'ezañ, Henok e hano, avieler ha kenderv da sant Samson. Lod all eus e zanvez a gavas el lavariou a c'henou da c'henou en doa klevet epad e veaj tra-mor.

Hogos sur e ouezomp evelse e oa kerent Samson tud a renk uhel, e dad ganet en Demetia (kreisteiz Bro-Gembre), e vamm ginidik eus Gwent, en hevelep korn-douar. D'e bemp bloaz, eo kaset gant e gerent da skol Iltud, hanvet "mestr brudet ar Vrezoned, bet diskibl da sant Jermen ha beleget gantañ". Meur a vloavezh e chom Samson e manati Iltud, ma voe graet goude-se avieler ha beleg gant an eskob Dubrizius (maro er bloaz 612). Mont a ra goude da vanati Piron, hag endra ma chom eno, e tizro e dad ouz Doue; mont a ra hemañ da vanac'h gant meur a hini eus e vibien; ar vamm a ra evelo. Da varo Piron, Samson a zo lakaet en e lec'h, met prestik goude en em denn en eur peniti. Ar skrivagner a ziskleir beza gwelet ar peniti-se tost d'ar stêr Havren (Severn): bez' e oa d'e amzer evel eul lec'h sakr, savet ennan eun ~~peniti~~ ti-pedi war ar plas ma kane Samson an oferenn da sul.

Goursavet^{*} e vez alies hor Sant: eur wech, araok m'eo graet eskob, e wel Per, Jakez ha Yann; eur wech all, eun ael en em ziskouez d'ezañ evit kemenn d'ezañ loc'ha ha mont da vroioù all. Epad e veaj, en deus eur weladenn^{*} gant Viniavus, eur manac'h hag a gemer eun ton diouganus evit lavarout d'ezañ kenderc'hel gant e hent wardu Europa (en tu all d'ar mor). E Trekuria, e tegouez gant paganed hag e ra d'ezo freuza an doueou fals a azeulont. Laza 'ra eun aerouant^{*}; gant e

bedenn e laka eun eienenn da strinka; e dad a laka e penn eur manati er vro-se hag heñ a dreiz ar mor.

Gellet 'z eus bet tresa red-hent* Samson adalek Bro-Gembre, a-dreuz Kerne Veur, betek kemer ar vag wardu Breiz-Vihan, rak an hanoioù a zo er Vuhez-se a zo "holl, eme an Ao. Doble, hanoioù gwirion tud ha lec'hiou". Eun daolenn hon eus aze eus stad Breiz Veur da vare ar Sent, wardro hanter ar c'houec'hvet kantved. Ha dacust d'an dro-blenn da veza disijin, lenner ar Vuhez-se a gloz al levr en eur gredi ervat beza lennet ar wirionez. Chom a ra en e spered evel eur welidigez eus menezioù ha koajou Bro-Gembre, eus aberioù ha geunioù Bro-Gerne, met chom a ra ivez sebezet o sonjal er gouelioù bras lidet er manatioù keltiek hag o sonjal e oa Samson eur rener poblou eus ar c'henta, nerzek hag oberiant.

Tizout a reomp ar wirionez er Vuhez kenta-se; he gwelout a rafemp c'hoaz, ma pisafemp ouz ar Buheziou all, daoust d'ezo beza nevesoc'h. Arabat ober fae war ar Buheziou-se evel war skridoù didalvez: dont a reont peurliesha eus Buheziou kosoc'h. Diaesa tra, pa gloger d'o studia, eo digemmeska ar wirionez diouz ar c'hinkladurioù lakaet en-dro d'ezi evit he bravaat. Hogen aesoc'h eo kas da benn an enklask-se pa studier da heul ar savadurioù hag an hanoioù lec'hiou. Ar skiant-mañ, nevez-flamm c'hoaz, he deus digoret hent d'ober kavadennoù talvoudus meurbet, hag he zachenn a zo tonket d'ezi kreski c'hoaz. "Ar sent-hanvadurouriez", eme Largillière warlerc'h J. Loth, a zo e Breiz, koulz hag e Kembre pe Gerne Veur, skourr pouezusa ar sentvuhezouriez. En teir bro, n'eo ket dre Buheziou ar Sent hon eus ar muia anaoudegez diwarbenn ar Sent ha diazezadur an Iliz; dre an hanoioù lec'hiou eo." E Bro-Saoz, eur Gevredigez, "English Place-name Society", a embann studiadennou talvoudek kenañ evit an nep a zo troet gant Sent Breiz, a-zivout hanoioù-lec'hiou pep kontelez a Vro-Saoz.

En daou du da Vor Breiz, istor hor Sent a zo skrivet war an douar.

b/ AR SAVADURIOU*

Da genta emañ ar c'hroazioù hent. Niverus meurbet int dreistholl e Kerne Veur. An Ao. Henderson en deus kontet 350 anezo, e doug eur pennad a vil bloaz, eus ar pempvet betek ar pemzekvet kantved, tra ma voe Iliz Kerne, tro ha tro, keltiek (iwerzonek ha kembraek), saoz, norman. Ar re gosa eus ar c'hroazioù-se a zo eta eus an amzer geltiek. Hep mar ebet int bet savet gant ar Sent, hervez skouer Samson o tiskar eur fals-doue hag o verka gant sin ar Groaz eur maen e kichen. Hag ahendall, meur a hini eus ar c'hroazioù-se a zegas sonj eus

ar Sent. E Buhez sant Kolumba, skrivet gant Adamnan, e lennomp e voe savet eur groaz el lec'h ma varvas Ernan, hag eun all el lec'h m'edo Kolumba pa varvas Ernan. Eun diell^x eus ar roue Edgar, embannet er bloavez 960 a-zivout sant Peran, a daolenn ken piz doare eur graoz ma c'heller hec'h hevelebekaat^x gant kroaz vrudet sant Peran, a weler c'hoaz hirio.

Bez' ez eus mein gant enskrivaduriou. Meur a hini a weler e Kerne Veur hag a dle beza eus amzer ar Sent. War unan anezo, e iliz Kubert, e lenner hano Tigernomalus; hogen Buhez kenta sant Samson a zo kinniget d'eun den eus an hano-se, eskob e Dol. War groaz Penzans e lenner "Ricati", a dle beza an hevelep hini gant Riagat. Hag, hervez an Ao. Loth, Riagat eo ar sant a gaver e hano (mazaouet, evit gwir) el litanieu koz: "Sancte Rucate", hano bet miret e parrez Treffiagat -e kichen Pont 'n Abad- skrivet gwechall Tref-Riagat. Ouspenn-se: war vaen Sant-Kuby, e kichen an hano-se a "Ricatus", e weler "Nonnita", da geñveria gant Nonna pe Nonn, enoret kalz er broiou keltiek (da skouer: sant Nonna, patron Penmarc'h, sko ouz Treffiagat. Sellout ouz Logonna, Dirinon, Lennon, Lannon e Bannaleg; Alartarnon ha parrez koz Plou-Nent e Kerne Veur⁽¹⁾). Hogen maen Sant-Kuby a zo eus ar pempvet pe eus ar c'houec'hvet kantved.

(1) Unan eus ar c'hudennou dedennusa da ziluzia eo hini ar parrezioù dediet da Sant pe Santez Nonna.

Altarnon (ar pez a dalv "aoter Nonna"), brasa parrez Kerne Veur, a zo dindan paeroniezh santez Nonna, a zo ivez patronez Pelynt (= Plou-Nent, parrez Nonna). Santez Nonna a vefe mamm sant David, hervez Buhez sant David eus an XI^{vet} kantved. Bez' ez eus ouspenn eun Istor Santez Nonn ha Sant Devi e gwerzennoù gallek koz. Hag e kement lec'h e vefe eun iliz da santez Nonna, e kaver sant David enoret en trowardroioù. E Kerne Veur, n'emañ Davidstow nemet eun nebeut miliadoù-saoz eus Altarnon. E Breiz ive, n'emañ ket pell parrez Sant-Divi (Dewi pe David) eus Dirinon, a zo santez Nonna he fatronez (e parrez Dirinon e kaver diou feunteun sakr dediet unan da santez Nonna, eben da sant Divi, gant, en he c'hichen, eur chapel da sant Divi)... E Penmarc'h, e vez enoret, e giz patron, eun eskob Nonna, graet anezañ Vouga gant Alberz Ar Bras, an hevelep hini, gouez d'ezañ, ha patron St-Vouga. Kement-mañ a ziskouez pegen luziet eo ar gudenn. Met bourrusoc'h bourrusa dre ma 'z eus lec'hioù niverus o tougen an eil hano pe egile, e Kerne Vreiz Lennon ha Lannon (e Banaleg), reou all e Kerne Veur ha Kembre... Sonjal a reomp eo bet kemmesket, e meur a zegouez, hanoioù ar Sant hag ar Santez, hag e tle hano sant Nonna eskob beza

Bez' emañ c'hoaz ar feunteunioù sakr. Alies e Kerne Veur e tougont an hano a "venton" pe a "fenton", staget outañ hanoioù ar Sent a savas o manatioù en o c'hichen. Hor Sent a rac stad vras eus ar feunteunioù. Dibaba a raent lec'h o feniti pe o manati demdost d'eur feunteun, rak bez' ec'h implijent kalz a zour, n'eo ket hepken evit ezommoù an ti, met evit an emwalc'hi hag an emsouba, a oa ar c'hiz anezo etouez ar venec'h kelt.

Evelse, dre studia bolzou-eñvor* Kerne Veur, e c'hellomp sevel a-nebeudou betek-prezegerien genta an Aviel hag e welomp anat e touge ar Sent-se an hevelep hanoioù hag ar re-ni.

k/ AL LEC'HIADUROURIEZ*

Gwelloc'h c'hoaz eget ar savadurioù eo bet studiet lec'hiadurouriez sakr an diou vro. "An hanoioù lec'hioù, eme an Ao. Doble, a zo heñvel ouz ar spoue a welomp war ribl hon aochou, war c'horre ar mor, hag a ziskuilh ar rouejou diwel." Lakaat a reomp amañ eur steudad eus an hanoioù-se, diouz renk al lizerennoù.

Sant Brieg en deus roet e hano da vBrioc, Llandyfriog er C'hardigan, Brixham ha Brixton en Devon, St-Breoke e Kerne Veur, ha Sant-Brieg e Breiz-Izel.

Sant Budog a zo meur a barrez paeroniet gantañ: Budock-Vean, St-Budeaux e kichen Plymouth, Budock's Ottery, Bude ha Bidefort en Devon ha Kerne; hag e Breiz-Izel eo anavezet e nouspet parrez, awechou dindan hano Beuzeg: Beuzeg-Kab-Kaval, Kab-Sizun, Konk...

Sant Burian, pe Berien, eo patron Burian e Kerne Veur, ha Berrien e Breiz.

Sant Karanteg en deus roet e hano da gKrantock e Kerne Veur, hag, e Breiz, da barrezioù Karanteg ha Tregaranteg.

Sant Kleder : Clether e Kerne Veur, ha Kleder e Breiz

Sant Kolumba pe Koulm: St-Columb-vras ha St-Columb-vihan e Kerne Veur, Plougoulm e Bro-Leon ha St-Coulomb e eskopti Roazon (1).

bet an hano kenta ha gwirion (dre ma ne gaver ket da genta hanoioù merc'hed etouez Sent Breiz; kemeret o defe santez Nonna ha sant David, kenstrollet evañ mamm ha mab, lec'h David ha Nonna, kevelerien e prezegerez ar feiz.

(Tennet eus levr Doble ha Kerbiriou: "Les Saints Bretons", p.28)

(1) Ne dleer ket treuzkemerout sant Koulm pe Kolumba (hanvet c'hoaz Kolumkill: "columba cellae") evit sant Kolumban, pe Koulman (latin Columbanus). Koulm, ganet wardro 521, a voe anezañ abad enezennig Iona ha prezeger an Aviel d'ar Bikted.

Sant Kolan : Colan e Kerne Veur, ha Langolen e Kerne Vreiz.

Sant David : Davidstow e Kerne Veur, ha Sant-Divi e Bro-Leon

Sant Dey : St-Day e Kerne Veur, hag e Breiz Sant-Dey (skrivet ha distaget St-They) ha Lothey.

Sant Gwinear : Gwinear e Kerne Veur, Lok-Eginer ha Pluvigner e Breiz.

Sant Gwereg pe Gireg : Capel-Gurig, Llangurig, Porth-Kerry hag all e Bro-Gembre, Perroz-Gireg, Lokireg hag all e Breiz.

Sant Herve : Lanherne e Kerne Veur, ha Lanhouarne e Bro-Leon.

Sant Iltud : Llantivit-bras e Kembre, Lanildud e goueled Leon.

Sant Kae : Keo e Kerne Veur, Landege e Kerne Veur ha Devon, Landegai e Kembre, Sant-Kae-Perz-Olued (Portrieux), Sant-Kae-Perroz hag eun niver bras a diez-pedi hag a feunteuniou.

Sant Maodez : St-Mawes e Kerne Veur, Lanvodez e eskopti St-Brieg

Sant Maeog (distaget Sant Vaeog - Saint Mayeux) : kêr Feock demdost da borz Falmouth; dek parrez e Breiz a echu o hano gant -veoc, -meoc, -meeuc.

Sant Merin : St-Merryn e Kerne Veur, ha Lanverin e eskopti St-Brieg.

Sant Meven : St-Mewan e Kerne Veur, hag e Breiz abati Sant-Meven (Saint-Méen e eskopti Roazon), parrezioù St-Meven (distaget St-Neven), Ploeven, Tremeven, Lanneven.

Sant Paol Aorelian : parrez Paol e Kerne Veur, ha Kastell-Paol e Leon.

Sant Peran : teir barrez e Kerne Veur, hag e Breiz St-Peran e Pennpont, Loperan e St-Malo-Teir-Feunteun, St-Peran e Trezilide.

Sant Petrok : Petrockstow ha Little Petherick (St-Petrok bihan) e Kerne Veur - Lopereg e Kerne Vreiz (hanvet gwechall "locus Petroci").

Sant Tudi : St-Tudy e Kerne Veur, Loktudi hag an Enez-Tudi e Breiz.

Kavout a reomp c'hoaz traou all souezus meurbet da geñveria. Da skouer, e Bro-Leon ez eus diou barrez amezek: Plouzeniel ha Tregaranteg; hogen er C'hardigan, an diou barrez Llandeiniol ha Llangranog a zo ive kichen ha kichen. E Kembre ez eus Capel-Gurig hag enez St-Tudwal; hogen Alberz Ar Bras a laka e oa sant Kireg unan eus mignoned sant Tudwal. Ouspenn-se, Capel-Gurig a zo war zouar Landegai (Lann Sant Kae), ar pezh a ra adarre sonjal e oa darempred etre sant Gireg ha sant Kae, evel m'emañ e Breiz Perroz-Gireg tost da Sant-Kae. E Kerne Veur, Davidstow a zo eur barrez tost da Altarnon, evel e Breiz St-Divi ha Dirinon; e Dirinon zoken ez eus diou feunteun sakr, gwestlet unan da santez Nonna, eben da sant Divi gant eur chapel da sant Divi harp enni. An Ao. Doble a ziskouez d'eomp,

e dalc'h ("district") Newquay (Kerne Veur), eun toullad parrezioù hanvet diwar ar Sent Petrok, Ewan, Merin, Brieg, Eval, Kolumba, Kolan, Karantok, Enoder; merka a ra an darempred o deus bet ar Sent-se kenetrezo hag an enor rentet d'ezo ken e Kerne Veur, ken war ribl hanternoz ar mor e Breiz Izel . Evit gwelout pegement eo bet en em ledet kehelerez* darn eus ar Sent, sonjomp ez eus 28 parrez paeroniet gant sant Petrok en Domnonia goz (da lavarout eo Kerne Veur ha Devon), ha 26 chapel pe iliz dediet da sant Samson e Breiz Vihan hepken.

* *
* *

III. KEHELEREZ* D'AR SENT KOZ BREZON

Eus ar pezh emañ o paouez lavarout e tennomp eur brouenn asur eus an darempredjou a rene, d'ar mare ma skigned an Aviel, etre ar C'hardigan, aochou kreisteiz Kerne Veur hag arvorioù hanternoz Breiz. Kerne Veur, daoust ma n'eo ket bro c'hinidik hor Sent, a zo ar vro ma rejont ar muia o annez* enni. Darn anezo marteze deuet eus Iwerzon, met hogos holl kembreiz, eun ehan o deus graet eno abarz pignat er vag etrezek aochou Breiz Vihan.

Hor Breiz-ni a oa eur vro hag a zegoueze mat-tre evit degemer ermaeziadeg* Brezoned an Enezenn Vras pa gimiadjont diouz o bro evit tec'hout dirak ar Saozon, pe poulzet gant ar c'hoant trevadenni*. Kaout a raent, war zouar hor bro, tud eus o gouenn, o komz an hevelep yez marteze.

Met Breiz Izel d'he zro he devezo he Sent ganet enni, hag o c'hehelerez a dreizo ar mor, evel ma erruo evit sant Kaourantin ha sant Gwenole: o hanoioù a zo kenstrollet du-ze evel du-mañ. Gunwalloe, ar barrez paeroniet gant Gwenole e Kerne Veur, a zo amezeged da barrez Kury, pe Kurriton, hanvet diwar sant Kaourantin; hag ouspenn-se eo dao merzout penaos, tost d'an diou barrez-se, en em gav hini Landewenack.

Diwezatac'h, goude pa voe skignet an Aviel, e kendalc'h an darempred etre an diou vro. Ar roue Edward ar C'hofesour a ro gwir a vourc'hiz* d'ar Vretoned arvorigat a zivro da Vro-Saoz evit tec'hout dirak an Normaned, rak, emezañ, "bez' ez int kenvroiz... Qoniam exierunt quondam de corpore regni hujus".

Araok ar roue Edward, en amzer ar ouenn rouaned saoz, dindan ar roue Athelstan, mab-bihan da Alfred, e oa bet kaset, eus Breiz da Vro-Saoz, kalz relegou Sent. Athelstan a oa eun dastumer relegou. O veza m'en doa resevet kalz digant Alan Barvek egiz merk a drugarez evit ar sikour vat roet d'ezañ da zouara

en e zukelez er bloavez 938 ha da gas kuit an Normaned, e kavas tro, d'an ampoent, da startaat kehelidigez ar Sent en Enezenn. Relegou sant Kaourantin, Gwenole, Tudwal, Samson, Malo, Petrok, hag all, a yeas da ilizou, abatiou ha manatiou Bro-Saoz; hag e-trok outo, e roas ar roue d'e vignoned a Vreiz relegou sant Yann a Veverley ha santez Etheldreda: setu penaos omp deuet da gaout e Gwened eur barrez hanvet St-Yann-Brevelae, hag e welomp santez Etheldreda enoret e Treflez, peurliesad dindan an hano a santez Ediltrud, pe c'hoaz santez Wentrok,

Dont a ra eta ar burutellerez*, er bloaveziou diweza tremenet, da harpa ha da suraat lod kenteliou miret gant an hengouniou* ha da adnevezi reou all. Ar vogidell gevrinus a c'holo amzeriou kenta ar gristeniez en hor bro a laka an enklaskou-se da veza trivliusoc'h*. An tachadou tenval a zeu da sklaeraat gant kavadennoù an helennegezh*. Ret eo meuli ar glaskerien o deus adnevezet eur gudenn hag a gavemp diaes gwelout ober ganti a-enep feiz hag hengouniou Breiz.

Klaskomp ar poent. Kendastumou* (pe klozaduriou) a bouez a zo gounezet, met chom a ra c'hoaz eleiz a gudennou da zirouestla. Gwelomp da genta darn eus ar re-mañ:

KUDENNOU ARVARUS C'HOAZ

a/ Pobl Arvorig, a voe kemmesket ganti ar Vretoned o tont eus Bro-Saoz, ha komz a rae an hevelep yez ganto? Gwechall, sur mat, he doa komzet eur yez keltiek; bez' e c'helle beza chomet eur roud bennak diwarni, dreistholl er c'horniou na oant ket bet tizet, koulz lavarout tamm, gant sevenadurez ar Romaned.

b/ Ha bez' e oa kristenien e-touez ar bobl-se? Ha ma oa anezo, hervez pe gementad? Al lodenn uhela eus al led-enez*, muic'h romanekaet, he doa araok ermaeziadeg ar Vretoned, daou eskopti gall-roman: Naoned ha Roazon. N'eus meneg ebet eus seurt eskoptiou-se el lodenn ma vrezoneger enni hirio c'hoaz, nemet e Gwened, ha c'hoaz an eskopti-mañ a voe diazezet kalz diwezatac'h eget an daou all. En tachad pella er c'hornog (e Leon, Treger ha Kerne), eo da gredi e kavas an divroidi muic'h a baganed, marteze zoken eur bobl chomet pagan en he fez.

KENDASTUMOU GOUNEZET

Gwelomp bremañ ar c'hlozaduriou a seblant beza tizet ha gounezet da wir:

1/ Eus an tachadou keltiek a zo e kornog-izel Breiz Veur eo deuet ar Sent a droas Breiz Izel ouz Doue. Bro Iwerzon, en eneb d'ar pezh a greded

en amzer Alberz Ar Bras, n'he deus ket labouret, ez-eeun da vihana, war brezegerezh an Aviel en hor bro. Iwerzoniz, dre ma ne oant ket aloubet^x, n'o deus ket ranket divroa. An Ao. Largillière a lavar ne voe degaset hehelerezh ar Sent iwerzoniat e Breiz nemet kalz diwezatoe'h. Kolumba, pe Goulm (Koulmkill), Senan ha Ronan, int-i hepken, eo ar Sent iwerzoniat enoret e Breiz Vihan.

Deomp pisoc'h. Rannvroioù kornog izel Breiz Veur a oa enno an Domnonia goz (hirio Kerne Veur ha Devon) ha Bro-Gembre. Anat eo bremañ e voe Kerne Veur, bet kristenaet gant sant Jermen a Aukerr (pez a ra da gompren penaos eo enoret ar Sant-se e kornadoù 'zo), eur vro eus an dibab evit hor Sent koz, ha koulskoude n'hellomp he rei da vro c'hinidik da Sant ebet. Met al lusk^x relijiel digoret gant manatioù Iwerzon ha dispaket er C'heredijion (hirio kontelezoù Kardigan ha Pembroke e Kembre) a bouezas ar muia e levezon war Gerne Veur, ha da c'houde war hor Breiz-ni. Alberz Ar Bras a ra meneg eus Kembre ("la Cambrie"), kenkouls hag eus hanoioù-lec'hioù e Kerne Veur, evel m'en deus o c'havet er Buhezioù implijet gantañ, met n'anavez ket douaroniezh ar broioù-se.

2/ N'eo ket en eun taol e tivroas ar Vretoned. Gant ar Buhezioù emañ ar wirionezh pa ziskouezont ar Sent o treiza mor Breiz. An ermaeziadeg, bouc'het e hanterenn diweza ar pempvet kantved, a badas kant, kant-hanter-kant vloaz, ha muioù zoken. Penrliesañ an drevidi^x en em stabilaas da genta; ar veleien a heulias o c'henvroiz evit gwaranta d'ezo skoazell ar relijion ha diazeza an Iliz e trevadennoù breizat Arvorig. Gwelout a reomp trevidi, abenn neuze mistri war ar vro, o rei douarou d'ar venec'h a zegouez war o lerc'h. Sant Brieg, deuet eus ar C'hardigan, a gav, en eur zouara en Arvorig, eur pennrener, hanvet Rigwal, laouen o heti d'ar venec'h donedigez vat en e gêr. Paol Aorelian a erru gant ar c'hont Withur, kar d'ezañ, en Enez Vaz. Tudwal, war aochou Bro-Dreger, a zegouez gant e genderv, ar c'hont Deroc'h, a ro d'ezañ meur a barrez.

3/ Beleien tra-mor a reas o annez da genta evel penitiourien^x tost d'an aod elec'h m'o doa douaret, hag alies ez eus c'hoaz chapelioù eno o tougen o hanoioù; ha goudeze ez ejont dounoc'h en douarou da heul o c'henvroiz.

4/ Ar Sent ne gollent morse ar gwel eus o bro c'henidik. Ar Buhezioù, hini Samson da genta penn, a zezrevell^x alies o beajoù eus Breiz Veur da Vreiz Vihan, pe er c'hontrol.

Komzomp bremañ eun tammig eus skignadur o c'hehelerezh a dreuz an amzer ha dre ar broioù.

Roudou kehelidigez ar Sent breiaat a gaver e pevar-avel Bro-C'hall. Kement-se a zeu dre ma voe skignet o brud, hag ivez dre ma voe dezouget o relegou da vare aloubadeg an Normaned. Sant Kaourantin a gaver e hano en eul levr-psalmou eus Tours, en eur werz-veur hanvet "Romant Akin". Breviel Coutances a ra meneg eus sant Petrok, a gaver ivez el levr-psalmou implijet gant menec'h italiat Sant-Fransez. Sant Meven a zo enoret en Normandi, elec'h ez eus meur a barrez paeroniet gantañ ha Breuriezou savet dindan e hano; en em skigna a ra e vrud betek an hanternoz (er Somm), er reter (wardro Reims, er Jura), er c'hreiz (Cantal, Lozère), er c'hreisteiz (Aveyron, Hérault, Hte-Garonne).

Sklaer eo evelato, e voe e Breiz ar starta hag an ingala o c'hehelerez. Ar Grenn-Amzer a voe ar gwella mare evito, evel ma verk niver bras ar Buheziou skrivet neuze. Levr-diellou* Landevenneg a zo eus an navet kantved. An dorn-skridou diarbenn al liderez a veneg darn anezo: roll-merzerien Ekseter, Levr-eskob Lanalet (Sant-Malo bremañ) miret e levr di Rouen, Levr-ofereñ Breventeg miret e levraoueg Mazarin, h. a. Talvoudusoc'h c'hoaz evidomp eo Levr-ofereñ Sant-Vouga, miret gant ar brasa evez e presbital ar barrez-se. Eus trowardroioù ar bloavez 1000 e c'hellfe beza. Hogen, e litanioù ar Sadorn-Fask, a-unan gant ar Seiz Sant bras, enoret dreistholl e Tro-Breiz, e kavomp ennañ 18 hano all bet hevelebekaet ha re all n'eur ket bet evit o lenn.

Kaout a reomp en o zouez: Samson, Malo (Macutus), Gwidgal, Brieg, Melani, Patern, Kaourantin, Gwenole, Paol Aorelian (Paulinanus), Tudwal, Kolumba, Konogan, Tegoneg (Teconocus), Houardon, Lunaer, Becheve (Vio, Vouga?), Rivoare, Derien, Goueznou, Sulio, Eneour, Budmael (Budog), Houarne (Herve), Lohenus (Laouenan); Branwalar (Brevalaer).

Penacs he defe ar bobl ankounac'haet he Sent? Atanchou, kêriadennou, bourc'hou, feunteunioù a zouge o hanoioù. Savet o doa parrezioù, manatiou hag a zouge o hanoioù ivez. Mar deo, evel m'en deus diskouezet an Ao. Largillièr, al "lok" eus a-c'houde an aloubadegoù norman, ar "plou", al "lann", an "trev" a zo eus amzer an ermaeziadeg d'an Arvorig. Unan eus kavadennoù Largillièr eo ez oa ar parrezioù gant "plou" ar re gosa, diazezet ma voent gant beleien hag o deus lezet warno o hanoioù bepred abaoe.

Kehelidigez Sent Breiz a zo eta skrivet war an douar. Bez' he devoe koulskoude eur fallaenn warlerc'h brezelioù diwar-gredenn ar XVvet kantved. Selaouomp komzou an Tad Maner (1606 - 1683): "O sant Kaourantin benniget,

o welout ez oc'h bet ankounac'haet gant ho pobl keit all, goude m'he deus kement a zleadou en ho keñver, em eus kemeret an hardizegez da ziskouez d'ar bobl-mañ e tle hoc'h enori, ho trugarekaat, ho karout hag ho pedi." Alberz Ar Bras en doa tennet hor Sent a-zindan ar boultrenn hag an Tad Maner, o veza anaoudegez eus e levr (ober a ra meneg anezañ), a lakeas e labour abostolerez dindan baeroniez ar Sent deuet a-nevez diouz ar c'hiz.

* *
* *

IV. DOAREOU HOR SENT

Klaskomp bremañ sevel eus hor Sent eur skeudenn ha ne vo ket re c'haouiat.

Bez' e voent penitiourien pe venec'h. An Ao. Henderson a gemenn d'eomp penaos an ilizou, pa 'z int bet da genta chapelioù penitiourien, a zo savet peurliesha war lein torgennou, evel St-Wenn, St-Eval, St-Issey, elec'h an ilizou a voe gwechall manatioù a zo diazezet e doun an traoniennou, war ribl eur wazenn-dour, evel St-Kew, Padstow, Mawgan, Lanevet. Hevelep tra en hor bro: sant Kaourantin a oa e beniti ouz kostez Menez-Hom, endra ma save sant Gwenole e vanati war ribl ar mor. War aochou lenn-vor Brest hag e kichen ar stêrioù Oded, Jaodi, Leger, Rañs, mor Intel, e weler c'hoaz roudou ar manatioù kenta.

Ilizou ar manatioù keltiek n'oant ket bras ha plijus d'ar gweled evel hon ilizou bremañ, savadurioù kaer en-dro d'ezo. Eur manati a oa graet gant logou koad, kambrouigoù heñvel ouz koloennou-gwenan, bodet en-dro d'eun ilizig e koad pe vein benet dre vras. Er manatioù bras e oa evelse meur a di-pedi. An abad, a rene buhez ar manati, en doa eul logell savet war eur run evit evesaat ouz al leandi a-bez. Demdost, eur feunteun, hag eul lec'h evit ar beziou, merket gant kroazioù mein.

Ar venec'h a rae labourioù dorn, difraostadennoù ha gounidoù douar. E iliz-veur St-Brieg e oa, d'ar XVII^{vet} kantved, eur ballenn-voger* hag e oa livet warni sant Brieg, gant e venec'h, o tiskara gwez, kompeza douar ha dougen mein evit ar savadurioù.

Al labour-spered ne oa ket dilezet gant ar venec'h. Ar manatioù bras o doa eur skol: e Kembre, skol sant Iltud a oa brudet dispar, kerkoulz ha hini sant Budog en enez Lavrez, tost da Bempoull, ma studias enni sant Gwenole. Lenn, studia, pedi, yuni: setu o labourioù c'houeka.

An emgastiza a oa unan eus o brasa lezennou:yunou kalet hag eun doare piniennus rust meurbet,merket dreistholl gant ar bedenn lavaret an divrec'h e kroaz,pe gant an emsoubadennou en dour yen en eur zibuna levr ar psalmou a-bez pe eul lodenn anezañ.Ar feunteuniou o deus eur roll bras en o buhez,hag o gwelout a reomp o lakaat an dour da strinka eus an douar pa ra diouer d'ezo.

Kern-veleg pe troc'h-blec an dud-se dreistholl a souezo an estren,gant ar blec touz en hanter ziaraok eus ar penn,betek linenn an dioukouarn,met lezet da vont hir en a-dreñv.Gwisket e oant gant kreziou^x ledan ha gloaneier garo.Gant an abad e oa eur vaz heñvel kentoc'h ouz eur bourdon perc'hirin eget ouz eur gammell vesaer.Pep Sant en e veajou a gase gantañ eur maen aoter kelc'hiek.Eur c'hloc'h en doa pep hini ive.E Kerne Veur,e konter atao e touge sant Gwenole eur c'hloc'h evit gervel an dud.Son kloc'h an abad a c'halve ar venec'h d'ar bedenn.Darn eus ar c'hleier-se a zo miret c'hoaz en hon amzer. Hini sant Paol,meneget en navet kantved gant an danevellour Wormonoc a vez gwelet en iliz-veur Kastell.E Lokronan,emañ hini sant Ronan.An hini gosa moarvat eo hini sant Padraig,miret en eun arc'hedig kinklet gant mein prizius e Skol-Veur Dublin;er bloaz 522,e kaver hano anezi e bloaz-danevellou an Ulster.

x x
x

Menec'h pe benitiourien,Sent koz Breiz-Izel a zo bet misioner-ien.Ganto eo bet diazezet abred ar parrezioù,stag da genta ouz ar manatioù,ha diazezet int bet en eun doare start ha padus."Evit an dud divroet ha dibourvezet diskennet war aochou an Arvorig int bet sevenaerien^x.Eus o "lannou" pe benitiou,e rannent gant an dud reuzeudik-se sklerijenn o feiz hag o gouiziegez,skoazell ar relijion hag ar garantez kristen... O labour a zo bras dirak an istor,ha mat he deus graet ar bobl derc'hel sonj anezo,o lakaat-i war roll ar Sent." Ar c'homzou-se,skrivet gant Largillière,n'int nemet ar wirionez rik.Hep hor Sent koz,ne gomprenomp ket penaos eo bet skignet an Aviel en hor bro."Ex fructibus eorum cognoscetis eos",eme ar c'hardinal Baudrillart o kemerout ar gerioù-se evit testenn e brezegenn en enor da S.Kaourantin.Frouez mat o deus douget: ret eo eta lavarout e oa gouennet mat ar gwez.Enor d'ezo bepred!

x x
x

LEVR-LENNADUR Diwarbenn SENT VREIZ

N'eo ket hon sonj amañ rei eun daolenn beurglok eus al levr-
lennadur diwarbenn ar gudenn-mañ, nemet rei hepken hanciou al levriou pouezusa
ha talvoudeka. Diviët eo kalz anezo, diaes o c'havout, nemet levriou Largillière,
Doble ha Kerbiriou.

- Abad F. DUINE - Brévaires et Missels des Eglises et Abbayes Bretonnes de France
antérieurs au XVII^e siècle.
Rennes - Librairie générale de J. Plihon & L. Hommay, 1906
- Les Saints de Bretagne : Saint Samson.
Rennes - L. Bahon-Rault, 1909
- Les Saints de Bretagne : Saints de Domnonée.
Rennes - L. Bahon-Rault, 1912.
- Memento des Sources Hagiographiques de l'Histoire de Bretagne.
Rennes - L. Bahon-Rault, 1918.
(Gwelout war c'holoenn al levr-mañ roll levriou
an Ao. Duine hag ar pennadou embannet gantañ
betek neuze en dastumadennou evel l'Herminie,
Annales de Bretagne, Mém. Soc. Archéo. d'Ille-&-V.)
- Inventaire Liturgique de l'Hagiographie Bretonne.
Paris - Champion, 1922 (in-8^o, 300 pages)
- Catalogue des Sources Hagiographiques de l'Histoire de Bretagne
jusqu'à la fin du XII^e s.
Paris - Champion, 1922 (in-8^o, 64 pages)
- Dom L. GOUGAUD - Les Chrétientés Celtiques.
Paris - J. Gabalda & C^{ie}, 1911
- Jozef LOTH - L'émigration bretonne en Armorique
Paris - 1883 (levr-diazez, ha n'eo ket kosaet)
- Les Noms des Saints Bretons.
Paris - Champion, 1910.
- René LARGILLIÈRE - Les Saints et l'Organisation Chrétienne Primitive dans
l'Armorique Bretonne.
Rennes - J. Plihon & C. Hommay, 1925
- G. H. DOBLE & L. KERBIRIOU - Les Saints Bretons (Préface de Dom Gougaud).
Brest - Imprimerie Nouvelle L. Le Grand, 1933.
- Rev. Canon Gilbert H. DOBLE - Buhez-skridou Sent Keltiek, a-unanou (eun 40 anezo
embannet betekhen) gant studiadennoù all diwarbenn
ar Sent keltiek, e saozneg, dindan an hano-stroll
"Cornish Saints" series.
- Hiniennou zoken a zo bet troet e galleg, evel:
Un Saint de Cornwall dans les Côtes-du-Nord: S. Quat
Les Saints du Cornwall
Saint Brieuc, sa Vie et son Culte (embannet e St-Brieg)

D I G O R A D U R

DA LEVR AR PSALMOU

Mar en em gav tud poellek evit lenn gant aked barzonegou gres-ianek Pendaros, ha n'eo bet koulskoude nemet kaner dispar ar baotred-karr ha telenner an emgannou-mezornata^x, n'eo ket diaes sonjal e tere kalz muioc'h d'ar Psalmou hebreek beza tanvaet gant evez ha studi. Zoken hep konta an awen doueel hag o laka dispar, e trec'hont war ar barzonegou all gant o menozioù, atao eeun meurbet hag uhel war-eun-dro. Er wirionez hag en emzonezon da Zoue, e sked enno luskadou an ene. Kalz eus ar Psalmou, koulz ha levr Yob, koulz ha barzonegou an Diouganerien, n'o deus netra da c'houlenn digant ar c'haerderioù degaset d'imp gant an hen-amzer bagan.

Evidomp kristenien, n'eo ket aze eul lennegezh didalvoudek. Gant ar Psalmou e perc'hennomp pedennoù kantvedoù diweza ar Sinagoga, a oa desket dindan eñvor gant an Hebreed, kanet ganto e porzioù an Templ eilet gant kensonadeg ar binvioù-sonerezh, pe c'hoaz a-hed an hentoù pa 'z aent da Jeruzakem evit ar Pask ha gouelioù meur al Lezenn goz.

An herez-se he deus kemeret an Iliz abaoe he deizioù kenta: an Ebestel a welomp oc'h ober gant ar Psalmou (Ober. I, 16-20; IV, 33 - 35; Rom. III, 10, h. a.) Gwechall e veze desket dindan eñvor levr ar Psalmou a-bez gant kement hini a reseve an urzioù sakr, ha ret e oa hen ober, pa ne oa ket stañk al levrioù. Met an dud fidel zoken a oa ken kustum d'ober gant ar Psalmou ma veze klevet, hervez testeni Paola hag Eustokhium en o liziri, al labourerien douar o psalmi 'n eur labourat o farkoù. Ha kement all a lavar d'imp Sant Basilios: e straedoù kêr hag en o ziez e kane ar Gristenien ar Psalmou.

Lodenn benna ar Bedenn-iliz eo chomet bepred ar Psalmou a-hed kantvedoù buhez an Iliz. Ha gant adreizadur ar Brevial gant Pius an X^{vet} eo bet kemennet adarre lenn ar 150 psalm bep sizun.

Nemet e rañker anzav ez eo diaes-tre ober gant an destenn latin kinniget d'imp, ken fall eo bet troet alies. Kemer eun troadur graet piz a zo ret evit adkavout, gant ster gwirion ar psalmou, blaz o barzonezh kaer. Neuze e c'hellimp pedi, evel ma c'houlenn diganimp Sant Paol, "en eur gompren" (I Kor. XIV, 15) hag evel ma c'houlenne Sant Augustin digant e gristenien en arroud-mañ: "Nos

autem qui in Ecclesia divina eloquia cantare didicimus simul etiam instare, debemus esse quod scriptum est: Beatus populus qui scit jubilationem. Proinde, carissimi, quod consona voce cantavimus, sereno etiam corde nosse et videre debemus. (Enarratio 2 in Ps. XVIII) - Ni hag hon eus desket kana en Iliz komzou Doue 'n eur chom war eun dro dirazañ, ni a dle beza ar pezh a zo skrivet: Eur bobl hag a gompren he meuleudi. Setu perak, va breudeur ker, e tleomp c'hoaz anaout ha gwelout sklaer en hon spered ar pezh a ganomp a-unvouez."

x x

N i v e r a r P s a l m o u

Ar psalmou a zo anezo 150 e Bibl hebreek ar Masorah (1) hag er Vulgata. Testenn c'hresianek an Aleksandriiz a gont eur psalm 151 hag a zo, sur mat, diwiriek*.

Met n'eo ket hevelep an niverennadur er Bibl hebreek diouz eun tu, hag e troaduriou an Aleksandriiz hag ar Vulgata diouz an tu all. Setu amañ eun daolenn-geñveria:

<u>LXX ha Vulgata</u>	<u>Hebreek</u>
Ps. 9	9 - 10
eus 10 betek 112	eus 11 betek 113
Ps. 113	114 - 115
114 - 115	116
eus 116 betek 145	eus 117 betek 146
146 - 147	147
eus 148 betek 150	eus 148 betek 150

Pa veneger ar Psalmou eo dao eta merka peseurt niverennadur a zo bet digemeret, pe hini ar Vulgata pe hini an hebreeg.

N'eus ket e gwirionez 150 psalm disheñvel. Doubladuriou a zo, ha hiniennou a dle pe, da vihana, a c'hell beza sellet evel lodennoù an hevelep psalm, en doare ma tleerediskenn niver gwirion ar psalmou izeloc'h eget 150.

(1) Ar Bibl masoraek eo an destenn hebreek deuet betek ennomp goude labouriou Rabined ar 6^{vet}-10^{vet} kantved, graet Masoraiz anezo, hag o deus implijet, ar re genta, ar poentou-vogalennou (heñvaek, ne oa, en hebreeg, nemet kensonennou).

R a n n a d u r a r B s a l m e g

Etre pemp levr emañ rannet ar Bsalmeg en destenn hebreek, da lavarout eo (hervez niverennadur an hebreeg): I - 4I; 42 - 72; 73 * 89; 90 - 106 ha 107 - 150. Pephini eus al levriou en deus e dalbenn hag e zibenn. Eun niverennrenka a zo en talbenn, ha netra ken: levr kenta, eil, h.a. An dibenn a zo anezañ eur gwerzad-kloza, a gaver digemm pe dost e fin ar psalmou 4I, 72, 89 ha 106. Gant ar pempvet levr n'eus ket ar gwerzad-se, pa c'heller lakaat ar psalm 150 da wir psalm kloza. E dibenn an eil levr, taolit evez ouz an notenn: "Diwez pedennou David, mab Jesse"; n'he c'havit ket er re all.

Koz kenañ eo ar rannadur-se, pa gaver gwerzadou-kloza an hebreeg e troadur an Aleksandriiz, nemet e rankomp o c'hask er psalmou 40, 71, 88, 105, eun niverenn izeloc'h eget e Bibl ar Masorah, hervez m'hon eus displeget. Er Vulgata e verzomp hevelep tra hag en Aleksandriiz. En daou droadur-mañ, n'eus talbenn ebet d'ar pemp levr, ha n'int ket diframmet an eil diouz egile na disrannet evit al lagad, daoust d'ar gwerzadou-kloza o lakaat anat.

D a n v e z a r B s a l m e g

Hervez lavarenn Cheyne, "Psalmegou a zo er Bsalmeg". Setu aze eur wirionez hag a gavomp merket sklaer er Bsalmeg hec'h-unan.

a/ Da genta ez eus psalmou degaset diou wech, evel ar psalmou Vulg. 13 ha 52, eil lodenn ar psalm 39 adlakaet d'ober ar psalm 69. Ma vije bet strollad ar psalmou oberenn an hevelep dastumer penn-da-benn, ne c'heller ket kredi en dije enbarzet^x ennañ diou wech an hevelep psalm, nag adroet eun tamm eus eur psalm skrivet gant en e bez gantan araoek.

b/ Psalmou lakaet war hano an hevelep oberour a zo dastrewet e lec'h pe lec'h, evel ma weler en daolenn-mañ:

Levr 1	David	Vulg. 3 - 40
Levr 2	Mibien Kore	41 - 48
	Asaf	49
	David	50 - 70
	Salomon	71
Levr 3	Asaf	72 - 82
	Mibien Kore	83 - 84 ha 86 - 87
	David	85

	Etan	88
Levr 4	Moisez	89
	dishano	90,91,101,103,- 105
	David	100,102
Levr 5	David	107 - 109
	Ps. Allelouia	110 - 117
	Ps. an Dereziou	119 - 133
	David	137 - 144
	Ps. Allelouia	145 - 150

Ma vije bet graet an dastumadeg en eur wech, ez eo aes kompren e vije bet strollet kichen ha kichen holl bsalmou an hevelep oberour, da skouer re David ha re Asaf.

k/ Warlerc'h gwerzad-kloza an eil levr e lenner: "Diwez pedennou David, mab Jesse", ha koulskoude e kavomp c'hoaz, lakaet war hano David, eur psalm en trede levr, daou er pevare, pemzek er pempvet. Kement-se n'hall beza komprenet ma ne vefe an dastumadeg-vremañ kenstroll dastumadegoù all savet en arak.

Penaos avat, ha gant piou eo bet aozet an teskadou-se, n'omp ket evit hel lavarout. Diaes eo zoken rei amzeriadou. Gwirheñvel eo, evelato, e oa hor strollad 150 psalm, peurachuet en eun dastumadeg hepken a-benn ar 5^{vet} kantved arak Hor Salver.

Seurtou dishañvel ar Psalmou

Hep chom gant renkadurioù, lies ha lies hini anezo, kinniget evit ar psalmou (evel: psalmou azeuli, trugarekaat, goulenn, pinijenni, psalmou kentelia ha psalmou istor, h.a... taolomp evez hepken ouz an tri seurt-mañ: ar psalmou lizerennegek, psalmou an Hallel hag an Dereziou, ar psalmou mesiazel.

a/ Eur psalm lizerennegek eo an hini a weler ennañ al lizerennou hervez o renk el lizerenneg o tonet e penn pep rann-werzenn (Ps. 110-112 Vulg.), pe e penn pep gwerzenn (Ps. 24, 33, 144), pe c'hoaz pep poz (Ps. 9, 36, 118). En hini diwezmañ (ps. 118) ez eus muioc'h c'hoaz, pa grog, e pep poz, pep unan eus an 8 gwerzenn gant an hevelep lizerenn.

b/ Psalmou an Hallel (ar Veuleudi) ha psalmou an dereziou (pe ar graviou) a servije el lidou sakr.

Psalmou an Hallel (112 - 117 Vulg.) a veze kanet en Neomeniou,

da lavaret eo gant al loar nevez a verke penn ar miz, e goueliou ar Pentekost, an Teltennou, Dedi an Templ, ar Pask. D'ar gouel-mañ e vezent kanet da genta en Templ e-pad lazidigez an Oan, hag adkanet, diouz an noz, e pep tiegez, e kerz ar pred sakr.

Psalmou an dereziou pe ar graviou (II9 - I33 Vulg.) a veze kanet gant ar birc'hirined o pignat, o c'hravia war-du Jeruzalem, teir gwech ar bloaz, evit goueliou bras ar Pask, ar Pentekost hag an Teltennou.

k/ Mesiazel a raer eus ar psalmou ez eo diouganet enno donedigez, rouantelez, belegiez, poaniou, maro, adsavidigez ar Mesiaz. Mesiazel en e ster kenta hag eeun eo eur psalm pa vez ar Mesiaz e-unan sellet war-eeun gant an diougan. Mar ne denn ket ar psalm d'ar Mesiaz da genta, met d'eun den eus an Testamant koz hag a zo arouez ha skeudenn ar Salver, ez eo eur psalm mesiazel en e ster ameeun, mesiazel a-dreuz (pe a-skuér).

A n D e s t e n n H e b r e e k

Evel levriou all ar Bibl, eo bet gwastet ha damwastaret testenn hebreek ar Bsalmeg gant an eil-skriverien a-hed an amzeriou. N'eo ket diaes hen diskouez anat:

a/ dre geñveria, en destenn hebreek hec'h-unan, an doubladuriou a ziskouez d'imp daou stumm disheñvel eus an hevelep psalm, da skouer Psalm 13 ha 52 - Psalm 17 ha II Samuel, XXII.

b/ gant an toullou a gaver e hiniennou eus ar psalmou. Da skouer, er psalmou 9 ha 67 e kaver toullou frank awalc'h: en hini kenta anezo, eur psalm lizerennek anezañ, ne adkaver ket bepred ar ridennad kustum al lizerennou, hag e hañval ar poziou beza bet eilpennet awechou. Sklaer eo neuze kompren eo ret burutella an destenn.

k/ dre lakaat skoaz ouz skoaz troaduriou disheñvel ar Bsalmeg.

Peurvuia evelato, ne vern ket kalz ar gwastaduriou-se. Ha war bouez keñveria an hebreeg gant an troaduriou koz, e teu ar ouizieien a-benn da adkavout eun destenn wirheñvel. Er stumm m'eo deuet betek ennamp, eo c'hoaz an destenn hebreek-se an hini a ro d'imp ar psalmou en o gwella, en doare ma chom-hi diazez pep labour talvoudek diwarbenn ar psalmou.

Gwelomp bremañ an troaduriou.

Troadur an Aleksandriiz

An troadur-mañ eus an Testamant koz e gresianeg hanvet c'hoaz troadur an LXX troer diwar eun danevell diwir, a oa echu e kreiz an eil kantved arak Hor Salver.

Evit ar Psalmou, n'eo ket eus ar gwella. Tamall a c'heller d'ezañ beza re diouz ar ger, betek tremen ebioù d'ar ster ha diskouez bommoù-lavar diveizus". Ouspenn-se, klask a ra gwanaat an denheñvelderioù^x staget ouz an Aotrou Doue gant an hebreeg, ha klouaraat lavarennou nerzleun ar yez kenta.

Anat eo evelato e tiskouez, e meur a zegouez, eun destenn welloc'h hag a zo pep chañs ganti da veza ar stumm gwirion. Gwechou all, e servij da stouva toullou an hebreeg, o rei ar ger pe al lavarenn lammet kuit.

Troadurioù Latin

Arak Sant Hieronimus, e veze implijet en ilizou latin an troadur koz hanvet "(versio) Vetus Itala" hag a oa bet graet diwar hini an LXX, nann diwar an hebreeg. Adkempenn an troadur-se hervez testenn an Aleksandriiz, setu ar pezh a c'houlennas da genta ar Pab Sant Damasus digant Sant Hieronimus. Graet e voe gantañ an adkempenn-se evit ar Psalmou wardro ar bloazioù 383 - 384, e Roma: hanvet eo bet al labour-se Psalmeg Roman ("Psalterium Romanum"), dre ma c'hounezas an Itali hag e voe implijet eno betek ar Pab Pius ar 5^{vet} (1566). Psalm-digor ar Vijezezoù^x hag ar gwerzadou tennet eus ar psalmou implijet el Levr-ofereunn, hirio c'hoaz, a zo kemeret diwarnañ, ha Chaloned Iliz-veur Sant-Per e Roma a ra gantañ bepred evit an Ofis.

Buan e oa bet graet gant Sant Hieronimus an adkempenn. Ne oa ket dreist al labour, pell ac'hanoc. Goude maro Sant Damasus (384), distro e broioù ar Sav-heol, an Doktor santel a grogas e Betlehem gant adreizha an Testamant koz diwar labour gresianek Origenes, graet an Heksaplou anezañ, da lavaret eo "ar c'houec'h testenn", ma oa lakaet ennañ, keñver ha keñver, an destenn hebreek e lizerennoù hebreek ha gresianek, gant pevar zroadur gresianek. Labour Origenes, rener brudet skol Aleksandria (185-254), graet gant ar brasa evez ha paramantot gant sinou-burutella^x, a oa neuze an dornskrid patrom anezañ e levr di Kesarea, e Bro-Balestina. An adkempenn nevez graet gant Sant Hieronimus diwar an Heksaplou a zo bet degemeret gant Ilizou Galia hag hanvet, abalamour da-se, Psalmeg C'halian

("Psalterium Gallicanum"). An troadur-se eo a gaver implijet hirio en hon Brevia-
lou hag er Vulgata a-vremañ. Ar bsalmeg-se n'eo ket bet evelato troet diwar an
hebreeg, met diwar an testennoù gresianek hepken, ha fall awalc'h eo chomet bepred,
daoust d'ezi beza gwelloc'h eget ar re genta, ar "Vetus Itala" hag ar Bsalmeg
Roman.

Eun trede gwech ec'h adkrogas Sant Hieronimus gant troidigez ar
Bibl hag ar Psalmou, goulennet ma oa digantañ al labour nevez gant Sofronius, unan
eus e vignoned ha ne gave ket e gont e troadur an LXX evit komz diwarbenn ar
relijion gant ar Judevien. O veza klevet a-benn neuze trouz awalc'h diwarbenn
e reizaduriou kenta, ne blije ket d'hon Sant lakaat adarre da c'harmi ar re holl
a gave gwelloc'h mont bepred gant o boaziou kamm ha tort eget kemer poan d'o
eeuna ha d'o difalla; dao e vo nerz ar vignoniez evit dont a-benn eus e rukun.
Er wech-mañ e troe diwar an hebreeg war-eeun, an "hebraica veritas" evel ma
lavare. Ha kalz gwelloc'h eget en arack e teuas gantañ e daol. Hogen, hervez m'en
doa raksoñjet, degemeret e voe al labour nevez gant harzadegou e enebourien, ken
ne gredas ket an Iliz ober implij anezañ... Hag abaoe eo chomet an traou en Iliz
latin hep mont war-raok, en doare ma reomp bepred er breviañ gant ar Bsalmeg
C'halian daoust d'he faziou, o kaout hepken, d'hon frealzi, fizians en amzer-da-
zont ha, da c'hortoz, sikour troaduriou graet piz ha reiz er yezou a-vremañ:
stank emaint hirio, dre c'hras Doue.



EMWELADENN AR WERC'HEZ

GANT SANTEZ ELIZABED

"Ha neuze, mall ganti, ez eas Mari
e Bro ar menezioù" (Aviel Sant Lukaz, I, 39)

An Noz a dec'h:
Er mintin e splann ar ruzell
Drek heskenn pikerniou daskrignet.
Ar goañv a bella gant an Ankou e servijer.
Setu an Hañv....
Hag e dounder e vamm e santas ar bugel
Ar silvidigez 'oa o tonet.

" Perak e sellez drek ar voger,
Ha te prizoniet c'hoaz?
Dont a ran davedout, kenderv, te a vo Yann.
Dont a ran, luskellet e kavel beo va mamm
Evit ma vo sakret kevrin an dougerez.
Setu ma 'z oun ar vleunienn
A gresk e kuz e kalon ar blantenn,
O c'hortoz betek ma tarno.
Hini ebet ne oar betekhen,
Met te a ouio, te da genta."

En traou burzudus he defe da larout
E sonje ar Werc'hez.
Ha gant al levez e lamme he c'halon
Ken skañv hag eun heiezh,
Ken ouesk ha menn ar c'havr,
Hag he zreid war an hent a biglamme
'Vel he c'halon.

Splannoc'h eget liviou eun abardaevez hañv,
Kaeroc'h eget stered ha loar an nozvezioù
Eo merc'h Jeruzalem.

He saludit, plac'hed an douar,
Youc'hit d'ezi, plac'hed ar mor!
Ha te, an hini a oa hanvet gaonac'h,
Setu ma teu davedout
Da geniterv, leun a gened.
Rak an hini 'mañ-hi o tougen
E kan evitañ evned ar beureou
Hag e kresk evitañ bleuniou gwez ar menez:
D'e c'hoari 'servijo an heol hag an avel.

Petra rêz ez ti, Elizabed,
O soñjal, azezet, en traou ken souezus
C'hoarvezet d'az pried?
Ha n'eo ket c'hoaz echu.
Ret eo bet d'it kredi...
'Vit gwir, lorc'h 'zo ennout.
Nemet koulz an huñvre
N'eo ken bremañ
Pa stok ouz an treuzou treid ar Werc'hez.

" Bennoz Doue war an ti-mañ "

Hé deus youc'het eur vouez sklintin.
Ha dioustu,
'N eur santout ar bugel o tridal en he c'hof,
Ken m'eo kouezet war an douar
An tamm labour m'edo 'wriat,
He deus anavet.....

" Penaos e c'hellfen me koz ha brazez

Lammat c'hoaz gant ar joa
'Vit saludi mamm va Salver?
Met an hini 'zougan en deus graet evidoun.
Ha gouvezet em eus e tegasez ar C'helou-mat.
Ha pa c'h eus komzet d'imp,
Hon eus klevet warnomp
Bennoz Doue skuilhet gant da Salud,
Peogwir e perc'hennet Mab an holl vennoziou.

Mammenn an drugarez hag ar santelez flamm,
Te, dougerez ar C'hras, evelse da viken."

Ha mouez ar Werc'hez glan a nijellas....
Gwerzadou he c'hanenn, branskellet tu ha tu
Gant luskell hec'h ene.

Hag epad an tri miz ma chomas er menez,
E oa skuilhet en ti frondou an nevez-hañv,
Dre ma touge bepred bleunienn al levenez
En he c'halon hag en he c'horf.

Maodez GLANNDOUR

Gwener daouzek deizioù an Azvent
1937

+++++

En niverenn a zeu

e vouldimp amañ diou werzenn, bet embannet dija en dastumadenn wenedek
"Dihunamb" ha troet evit "Studi hag Ober" gant an oberour, Rpparz ar Mason,
"evit kreñvaat an darempred etre Gwened ha K.L.T."

PREZEGENN D'AR VUGALE

E DEIZ SAKRAMANT AR GONFIRMASION (1)

Va bugale,

Setu c'houi adarre bodet amañ dirak an Aotrou Doue, kaer gant ho kwiskamantou gwenn, e splannder hag e purentez ho tilhad komunion.

Setu c'houi aze, desket ganeoc'h ho relijion, o c'houzout braster ha santelez ar Vadeziant hoc'h eus resevet gwechall, rak deuet oc'h evit profa ar sakrifis a dleomp bep sul e ginnig d'An Aotrou Doue, Sakrifis santel korf ha gwad Hon Salver Jezuz Krist, priz hon silvidigez.

Met o c'hortoz eun dra bennak emaac'h er sul-mañ, o c'hortoz unan bennak: an Aotrou 'n Eskob? Ya. A zegaso d'eoc'h petra? Ar Spered Santel gant sakramant ar Gonfirmasion. Ha setu perak e tremenit an amzer o pedi an Hini a zo mestr an holl zonezonou hag an holl c'hrasou.

Met resev sakramant ar Gonfirmasion, petra eo? Marteze n'ouzoc'h ket mat. Sklaeroc'h e vo eun tammig marteze pa lavarin d'eoc'h ez eo resev eur garg hag eun enor nevez, resev eun hano nevez. Eur garg santel, eun enor kalz uheloc'h eget n'eus fors pehini war an douar: sakret e viot da soudarded meur Jezuz Krist, galvet da zifenn e relijion a-enep e enebourien ha da lakaat e pep lec'h ar reizder hag ar wirionez da ren.

Gwechall, epad ar Grenn-amzer, e oa soudarded meur war varc'h, hanvet marc'h-eien, a oa o micher difenn ar re baour, ar re reuzeudik, an intañvezed hag an emzivaded. Araok resev o c'harg e tremenent an noz o pedi; ha diouz ar beure, goude beza klevet an oferenn ha touet beza reiz en o buhez, e tegemerent o armou hag eur c'hleze evit beza barrek da zifenn bepred ar justis.

C'houi ivez, soudarded Jezuz Krist, n'oc'h ket dilezet gantañ hep armou. Roet e vo d'eoc'h nerz ar Spered Santel evel eur skoed d'en em zifenn - nerz ar Spered Santel evel eur c'hleze da drouc'ha e benn d'an enebour. Roet e vo d'eoc'h gant ho karg an tu d'he c'has da benn, nemet e vo arabat d'eoc'h lezel hoc'h armou

(1) Kalz eus ar sonjou displeget amañ a c'heller ivez ober ganto evit gouel ar Pentekost, hag evit eur gentel diwarbenn sakramant ar Gonfirmasion.

didalvez nag ho kleze da vergla. Ne vezo kavet ganeoc'h en ho taouarn ners ar Spered Santel nemet pa c'houlennot gantañ, dre eur bedenn start ha fizius, dont d'ho sikour ha d'ho skoazell.

Met neuze e responto d'ho kalvadenn. Ganeoc'h e vezo en abeg d'ar Sakramant ho po resevet hizio hag a laka ennomp gwir da resev ners Doue bep gwec'h ma c'houlennomp.

Ha piou a zeu da rei d'eoc'h an armou-se e kreiz eur gouel bras, dirak an holl gristenien all a zo bet sakret a-benn bremañ soudarded da Jezuz Krist, piou a zeu? An hini a zo hon rener, hon penn, an hini a zo karget d'hon gouarn, an Aotrou 'n Eskob. Digantañ e c'houlennit beza konfirmet, evit diskouez d'an holl e fell d'eoc'h senti outañ hag heulia e c'hourc'hemenn evel ma sent e-unan ouz an Tad Santel ar Pab, pennrener an holl Eskibien.

Marteze eo bremañ sklaeroc'h en ho sonj doare sakramant ar Gonfirmasion...met klaskomp c'hoaz petra c'hoarvezo dioustu en hoc'h eneoù, petra roio d'eoc'h dioustu an Aotrou Doue.

Ar pezh a zo war-nes c'hoarvezout ganeoc'h eo dres ha rik ar pezh a zo bet c'hoarvezet gant an Ebestel da zeiz ar Pentekost, dek devez goude ma voe pignet Hon Salver d'an Neñv. Sakramant ar Gonfirmasion eo ar Pentekost o tonet adarre evidoc'h, ar Pentekost warnoc'h. Dioustu e komprenot mat penaos.

Ho pezet sonj eus an Ebestel, petra oant arak diskenn ar Spered Santel warno. Tud aonik, digalon, spontik. Goude maro Hon Salver war ar Groaz, gant aon beza paket i ivez ha barnet d'ar maro evel Jezuz, ne glaskont nemet kuza. N'houlont ket mont er-maez, ne gredont ket en em ziskouez.

Al setu eta, Aotrou, hoc'h ebestel, ar re a dle skuilha ho kwirionez dre ar bed holl ha bruda dirak an holl boblou ho tonedigez! Koulskoude, e-pad tri bloavezh hoc'h eus graet kentel d'ezo; e-pad tri bloaz hoc'h eus graet katekiz d'ezo, bémdez Ha peseurt Mestr ne oac'h ket c'houi, Aotrou!

Int ivez o doa resevet ho korf hag ho kwad en eur gomunion sakr, eus ho taouarn, deiz arak ho maro war ar groaz. Ha lavaret ho poa d'ezo komzou a garantez ken dous ma tlejent beza bet kreñvaet ha kennerzet da viken.

E gwirionez, birvi a rae kalon an Ebestel. Toui a raent da Jezuz ne vijent ket evit e zilezel. Sant Per, muioc'h c'hoaz eget ar re all, a lavare gant holl ners e galon: "Ha pa vefe ret d'in mervel evidoc'h, Aotrou, ne nac'hin ket ac'hannoc'h!" Gouzout a rit petra rejont: dilezel Jezuz, tec'hout, e nac'ha e-pad e Basion, ha goude-se mont da guz leun a spouron.

Met Jezuz-heñ ne nac'h ket e Ebestel, ne zilez ket anezo. Goude e adsavidigez eus ar maro e teu d'o adkavout, d'o adsevel.

O-unan, apaour kaez tud, n'o deus ket dalc'het, dinerz int bet. Jezuz an hini a roio nerz d'ezo, o lakaio kalonek e pep riskl: rei a raio d'ezo ar Spered Santel. Hag e vo ar Pentekost. Setu e tiskenn warno ar Spered evit o entana, o luska, o c'has war rack da brezeg betek penn pella ar bed anavezet en amzer-se, evit embann kelou bras dasprenidigez Mab-den, kelou mat hon silvidigez.

Ni ivez, hizio, a c'hortoz diskenn ar Spered Santel, evel eur Pentekost nevez warnomp. Gant eur garantez pegen beo e tleomp pedi evel an Ebestel bodet holl er Gambr-lid evit resev ar Spered Glan prometet gant Jezuz!

Ar pezh a zo o tonet evidomp a zo dres ar pezh a zo c'hoarvezet a-benn neuze evit an Ebestel.

C'houi ivez, goude beza bet kelennet war ar relijion, hoc'h eus graet ho Pask e-kreiz goueliou kaer, a vo hiviziken miret ganeoc'h sonj anezo; graet hoc'h eus ho komunion o toui da Jezuz chom stag outañ; ha lavaret hoc'h eus d'ezañ gant birvilh ha trid-kalon: "Ho karout a rin, Aotrou, c'houi hag hoc'h eus wa c'haret kement da genta; n'houlan ket beza disrannet diouzoc'h; n'houlan ken nemet senti ouzoc'h, beza ho servijer d'eoc'h, c'houi hag a zo ar sklerijenn anddousa evit ar spered, an ezans ar c'houeka evit ar galon."

Prometet hoc'h eus, va bugale, beza kristen a-grenn, e pep tra. An den a dle beza kristen e pep tra hag e pep lec'h: en e diegez, en e vicher, en e genwerz, o lakaat dre holl an urz vat hag ar reizder kristen da drec'hi.

Prometet hoc'h eus, nemet e ouzoc'h pegen dinerz oc'h, ha goulennet hoc'h eus digant Jezuz Krist an nerz.

Jezuz a respont. Degemer a ra gant joa ho promesaou dre ma'z int graet gant eur galon glan hag eeun; fizians en deus ennoc'h. Ha setu perak e fell d'ezañ rei d'eoc'h eun enor nevez, ober ac'hanoc'h e soudarded veur hag e varc'heien. Hag evit ho lakaat kreñv ha kalonek evel ma tere ouz e soudarded, e ro d'eoc'h, dre ar Sakramant, ar Spered nerzus, galloudus, ar Spered Glan.

Ennomp e vo ar Spered ar pezh ez eo bet en eneo an Ebestel, an hini a ro lusk ha finv ha buhez. Ennomp e vo evel ar galon e-barz ar c'horf, an hini a ro ar vuhez.

Sellit penaos en deus ar Spered Santel kaset war-rack an Ebestel, ouz o lakaat da vont a-enep pep riskl, ouz o c'has betek penn pella an douar evit prezeg an Aviel, leun a garantez evit Jezuz betek mervel merzeriot evitañ.

Hañval eo ar Spered Glan ouz ar c'heflusker^x a gas war-raok eur wetur-dan. Hep eur c'heflusker mat da vont en-dro, n'eus netra d'ober; hep an nerz-se e chomfe ar wetur difin, maro... Evelse evidomp: hep ar Spered Santel n'hellomp ket mont war-raok war hent ar mad, war-du ar Baradoz.

Marteze oc'h bet eur wech bennak eneur vag dre dan. Gwelet hoc'h eus pegen skañv e rikl al lestrig war an dour, poulset gant o vins-tro. Met sonjit e chomfe a-sav ar c'heflusker a daol trumm, sac'het e kreiz ar mor bras... Setu e vefe maro kalon ar vag; setu eur stad fall meurbet. Ret e vefe d'ar vartoloded en om lakaat war ar roeñvou evit herzel ouz an tiz-dour a sach ar vag war an tu fall. Daoust hag e vo gwelet a-benn ar fin ar vag hanter-gollet gant eun all hag he sikouro, pe daoust hag e vo lonket gant ar mor diroll, torret ha breset ouz ar roc'hell.

Evelse eo ganimp. Hañval omp ouz eur vag oc'h ober eur veaj treiz a-dreuz mor bras ar vuhez betek porz an neñv. Ar Spered Santel an hini a lusk hag a vount ac'hanomp war rack evel keflusker ar vag. Pa dro, ez a mat an traou ganimp. Met lakit e paouezomp da bedi, e chomomp hep ober hon deveriou kristen... Neuze e kollomp, war zigresk ez a nerz ar c'heflusker; sac'het omp, prest omp da vont da goll.

Rak ne chomo ganimp ar Spered Santel nemet pa c'houlennomp digantañ dont ha chom pa vo deuet. Bepred e vo prest d'ober diouz hon goulenn, nemet ret eo d'imp goulenn. Na gredit ket e c'hellfe beza troet ho kalon gant ar Skaramant, evel dre vurzud, hep n'ho pije man d'ober. Nann... Ar Gonfirmasion a zo d'eoc'h eur gwir da gaout ganeoc'h ar Spered Santel bep gwech ma c'houlennot anezañ, nemet bepred e rankot e bedi. Setu perak goulennomp gant holl nerz hon ene, evit kaout founnus ha puilh.

Hon bezomp sonj o deus tremenet an Ebestel dek devez o pedi evit kempenn o eneo da resev ar Spered Glan. Araok degemer hizio sakramant ar Gonfirmasion, pedomp eta evit ma vo krenvaet da vat hon eneo gant donedigez ar Spered, hag evit ma chomo ganimp d'ober ennomp ha d'hon lakaat da vont war hent ar mad.

Dioustu, Spered Santel, e vimp sakret da soudarded meur Jezuz Krist. Resevet e vo ganimp ho Sakramant, da lavarout eo ar gwir d'ho kavout bep gwech ma c'houlennimp diganeoc'h dont d'hon sikour. A-benn breman, hep gortoz, e fell d'imp digeri da vras hon c'halonou evit o lezel digor d'eoc'h da viken. Bezit, Spered Santel, en hon buhez kristen, al lusker a gas war rack, ar galon a ro ar vuhez, ar flamm, an tan. Ra vimp bleniet ganeoc'h war-du porz an Neñvou, lec'h ma ho meulimp gant Doue an Tad hag e Vab Jezuz Krist, a gantvedou da gantvedou!

Evelse bezat graet!

FOLLENN - C'heriadur

ar 6^{vet} Niverenn

† † † † † † † † † † † † †

- A adanavezet : reconnu
aerouant : dragon, monstre
aloubadeg : invasion, conquête
annez : demeure, établissement
aour-teuz (sol -) : lingot d'or fondu
ardamez : emblème, blason
arvesterien : assistants, spectateurs
- B bloazdanevellourien : annalistes, chroniqueurs
Bollandiz : Bollandistes
bourc'hiz (gwir a v-) : droit de cité
breutadegou : contestations
burutellerez : critique
- CK Kaero : le Caire (e Bro-Ejipt)
kamm-amzeria : faire des anachronismes
kehelerez : culte - kehelus : pieux
krez : tunique
kendastumou : résultats, conclusions
- D deiziadur : calendrier
den-heñvelder : anthropomorphisme
dezrevell : raconter
dibaot : rare, extraordinaire
diell : charte
difaziadur : correction
Disivoud-meur : Réforme protestante
diveizus : inintelligible
divroidigez : émigration
diwiriek : inauthentique
douaroniez : géographie
- E elfenn : élément
erevent (liester diwar "aerouant") : dragons

emgann-emzornata : combat de boxe
enbarzet : introduit
ermaeziadeg : exode

G goursavet : ravi en extase
gwarezi (en em w-) : se réfugier
gwelddenn : entrevue
gwir a vourc'hiz : droit de cité

H helennegez : érudition
hengoun : tradition
hevelebekaat : identifier

Ch chifa : vexer

L led-enez : presque île
lec'hiadurouriez : topographie
lenne gez sentvuhezouriek : littérature hagiographique
levr-diellou : cartulaire
lusk : mouvement, impulsion

M marz : merveille
merzout : remarquer

P pisaat : préciser, étudier de près
prouenn : preuve

R red-buhez : carrière - red-hent : itinéraire
roll-merzerien : martyrologe

S savaduriou : monuments
skoed-ardamez : écusson
sened-beleien : synode (diocésain) - sened-iliz : concile
sent-hanvadurouriez : hagio-onomastique
sent-istorouriez, sentvuhezouriez : hagiographie
sevenaerien : civilisateurs
sinou-burutella : signes critiques

T tolzennad : foule, masse
trevadenni : coloniser - trevidi : colons
trivlius : émouvant

V Vijelezou : Matines

~~~~~